

[www.freemaths.fr](http://www.freemaths.fr)

# BACCALAURÉAT SUJET

Bac **LLCER, Breton**



ANTILLES-GUYANE  
**2025**

# BACCALAURÉAT GÉNÉRAL

ÉPREUVE D'ENSEIGNEMENT DE SPÉCIALITÉ

**SESSION 2025**

## **LANGUES, LITTÉRATURES ET CULTURES ÉTRANGÈRES ET RÉGIONALES**

**BRETON**

**Mercredi 18 juin 2025**

Durée de l'épreuve : **3 heures 30**

*L'usage du dictionnaire unilingue non encyclopédique est autorisé.  
La calculatrice n'est pas autorisée.*

Dès que ce sujet vous est remis, assurez-vous qu'il est complet.  
Ce sujet comporte 10 pages numérotées de 1/10 à 10/10.

**Le candidat traite au choix le sujet 1 ou le sujet 2.  
Il précisera sur la copie le numéro du sujet choisi.**

### Répartition des points

<b>Synthèse</b>	16 points
<b>Traduction ou transposition</b>	4 points

## SUJET 1

**Le sujet porte sur la thématique « Représentations et expressions de la mémoire »**

**Axe d'étude : « Écrire ses mémoires, écrire l'histoire »**

### **Partie 1 : synthèse du dossier (16 pts)**

**Prenez connaissance des documents du dossier et traitez le sujet suivant en breton :**

Savit ur pennad-skrid (war-dro 500 ger) diwar-benn an teir diell : gallout a reoc'h diskouez peseurt tud, peseurt darvoudoù zo bet lakaet war-wel e pep hini anezho ha peseurt talvoudegezh o deus an testenioù-se evit gouzout hiroc'h war an Eil Brezel-bed.

### **Partie 2 : traduisez le passage suivant du document C (lignes 27 à 34) en français.** **(4 pts)**

« War-dro peder eur hanter, e weler, a-greiz-tout, o tifoupañ war ar blasenn, un tregont soudard bennak o tont diouzh kostez Ploueskad, war o marc'hoù-houarn, hag i da dennañ war an dud. Eno neuze e sav kabal hag ur jadao all !... Paotr e akordeoñs a zo lazhet gant meur a hini all.

Un hantereur diwezhatoc'h ec'h erru daou gamion leun a soudarded, o tont eus Montroulez da reiñ skoazell da re Bloueskad.

Goude bezañ mindrailhet ar ru Verderel hag ar ru Vras, e lakaont ur pezh kanol war blasenn ar C'hreizkêr hag e tennont. »

Diell A



Mathurin Méheut, « La Kommandantur » (Kemper, 1940)  
Diwar al lec'hienn [www.traezhatevenn.com](http://www.traezhatevenn.com)

## Diell B

### Soudarded alaman en Uhelgoad

An dra-mañ a oa un nebeud devezhioù a-raok ma oa liberet Uhelgoad. O tont eus debriñ lein e oamp. Evel dabitud, ma breur ha me a oa o vont etrezek 'lec'h e veze un tammig reunion bemdez gant tout re yaouank kêr evit ober ar gont deus tout an troioù graet an noz a-raok, rak tout e oamp er Rezistañs.

5 Met, an deiz-se, a-boan e oamp 'maez an ti, me 'gleve trouz otoioù o sevel etrezek kêr. Ha ni, kerkent da guzhat. Deus hon c'huzhadenn hon doa gwelet div oto, ofisourien enno, oc'h ober tro kêr. Pa oant aet kuit, unan kozh a oa deuet da lâret deomp en doa gwelet anezho oc'h aretiñ war al leur-gêr. An ofisourien a oa diskennet ha, gant o jumelloù, o doa sellet en-dro tro-dro. Al leur-gêr a oa war an uhel hag alese e veze gwelet a-bell, hag ivez, 10 mat-tre bourk Uhelgoad. Da c'houde e oant aet war-zu hent bras ar Fouilhez.

Neuze e klevemp un dourni o sevel an hent, ha ni da welet petra 'oa. Ay ! Ur bern pezhioù kanol, stlejet gant kezeg, o sevel an hent ha lod anezho a oa dija war al leur-gêr.

Ne oa ket da zale ! Ret 'oa skampañ kuit ha mont da gavout ar gamaraded a oa er maki, du-se, e foñs Plouie. [...]

15 Kerkent, gant daou amezeg hon doa kemeret penn an hent evit mont d'ar maki. Ar Boched a oa bec'h warno o sevel ar pezhioù kanol e kêr gant o c'hezeg. [...]

Ar maki a oa e Kenec'h-Kribet, ur gêr kollet e foñs Plouie, en tu all da Sant Salaun. Evit mont di, ne oa nemet un tamm hent treuz, leun a bri hag a vouilhenn. Diouzhtu e veze an disterañ banne glav, an otoioù ne dalveze ket ar boan dezho esaat tostaat. Setu perak e 20 oa bet choazet ar plas-se, evit na deufe ket ar Boched gant o gweturioù.

Jean-Marie Le Scraigne, *Amzer ar vrezel 'kostez an Uhelgoad*, Brud Nevez, 2000, p. 82-84.

## Diell C

### Un darvoud skrijus e Kastell-Paol

D'ar 4 a viz Eost, diouzh ar mintin, tud yaouank eus kêr o krediñ e oa tost an Amerikaned - e Montroulez edont hervez ar gont - en em laka d'ober o mistri.

5 Da gentañ e klaskont trabas ouzh ar genlabourerien en un ostaleri. Evañ a reer boeson dreist kont. Ar gwin a sav buan d'ar penn. An taolioù teod a ya en-dro ha goude, an taolioù dorn. A daolioù boutailhoù goulo eo frigaset an traoù en ti hag ar gwer war ar prenester. Dre-holl, youc'h ha kanaouenn. Ar Marseillaise a ya en-dro : « Aux armes citoyens ! » Dispakañ a reer ar bannieloù triliv... Ur banniel triliv zoken a zo dija o fichal en avel ouzh unan eus tourioù an iliz-veur. Prestik goude, tour ar C'hreizkêr en deus ivez e hini...

10 Deuet bremañ da vezañ hardizh, pep hini a zispak e vanniel : pe un drapo trikolor, pe un drapo amerikan. A-benn kreisteiz n'ez eus nemet bannieloù dre-holl. Ar ruioù a zo leun a dud o youc'hal o levenez. Mont ha dont a reont a-vandenoù, en ur ganañ, un akordeoñs ganto.

15 Ur poltred eus Hitler a zo devet e-kreiz ar blasenn, c'hoarzh ha plijadur en-dro dezhañ. An Aotrou Maer, Alain de Guébriant, o c'houzout 'oa re abred ober kement all, a glask sioulaat an dud. Alamanted a zo c'hoazh er vro, armoù ganto... Den ebet avat ne sent outañ. Pep hini a ra e benn.

Dindan nerzh ar boeson e teuer da vezañ hardishoc'h-hardishañ. Lod a ya betek lemel o armoù digant ar soudarded a zo c'hoazh e blokosoù Gourveau.

20 Eüruzamant, ar re-mañ, hep stourm, en em lez da vezañ diarmet. Ken buan all avat o dije bet tennet ha lazhet ar re a glaske trabas outo.

Goude bezañ diarmet Alamanted Gourveau, atav ar memes re, paotred ar brouskoad, a gav dezho int barrek bremañ d'ober o mistri dre-holl e kêr... Liberet eo Kastell ganto ! Pebezh taol-kaer ha pebezh enor evito !... Ha na pegen brav eo bet aet an traoù en-dro !...  
25 Re vrav avat evit padout. [...]

War-dro peder eur hanter, e weler, a-greiz-tout, o tifoupañ war ar blasenn, un tregont soudard bennak o tont diouzh kostez Ploueskad, war o marc'hoù-houarn, hag i da dennañ war an dud. Eno neuze e sav kabal hag ur jabadao all !... Paotr e akordeoñs a zo lazhet gant meur a hini all.

30 Un hantereur diwezhatoc'h ec'h erru daou gamion leun a soudarded, o tont eus Montroulez da reiñ skoazell da re Bloueskad.

Goude bezañ mindrailhet ar ru Verderel hag ar ru Vras, e lakaont ur pezh kanol war blasenn ar C'hreizkêr hag e tennont.

35 Ezhomm ebet da lavaret pegen buan e oa riñset ar ruioù. Ken buan all eo bet dispeget an drapoioù diouzh ar prenester. Ur c'harr-brezel ganto, ar soudarded a zeu hag a ya dre ar ruioù war-lerc'h an dremenidi... Deuet int adarre da vezañ ar vistri e kêr.

Mont a reont neuze d'an ti-kêr leun a imor enno. Eno e kavont an Aotrou Maer, Alain de Guébriant. Tamall a reont dezhañ ar pezh a zo c'hoarvezet. Hemañ a glask sioulaat anezho, evel m'en doa klasket sioulaat paotred ar brouskoad. Met n'eus netra d'ober. Re ziwezhat eo !... Ne chom mui gantañ nemet kinnig e vuhez evit saveteiñ e bobl.

40 Sammet eo gant ar soudarded ha kaset war ar blasenn vihan a zo a-dreñv an iliz-veur, hag eno, kalonek dirak ar marv, sonn e benn, en ur bardoniñ moarvat d'e vourevien, e kouezh dindan an tennoù.

Diwar Visant Seité, *Darvoudoù brezel va c'horn-bro : 1944*, Emgleo Breiz, 1987

## SUJET 2

**Le sujet porte sur la thématique « Pouvoirs et contre-pouvoirs »**

**Axe d'étude : « Les désobéissances sociales, une tradition ? »**

### **Partie 1 : synthèse du dossier (16 pts)**

**Prenez connaissance des documents du dossier et traitez le sujet suivant en breton :**

Savit ur pennad-skrid (war-dro 500 ger) diwar an dielloù. Gallout a reoc'h toullañ meur a hent ha klask gouzout :

- a) petra a lak ar Vretoned da vont war ar straed da zifenn o mennozhioù (abegoù sevenadurel, sokial, politikel...);
- b) hag un hengoun eo deuet ar manifestadegoù da vezañ ;
- c) hag un enep-galloud efedus eo an doare-se da stourm.

### **Partie 2 : traduisez le passage suivant du document B (lignes 19 à 25) en français. (4 pts)**

« Strakadennoù a fuc'has soudan a-dreñv o c'hein, war-du penn ar straed Dagobert ma oant aet e-biou dezhi ur pennadig 'oa. Tamm-ha-tamm e tavas ar ganerien hag an dibunadeg a chomas evel sac'het. Youc'hadennoù skiltr a gleved en a-dreñv. Sutadennoù hir a save ha strakadennoù adarre. Klask a rae ar strolladoù mont war o c'hiz. N'hellent ket, ken stanket e oa ar straed gant an engroez. E solieradurioù an tiez, a bep tu, ne selle mui an dud d'an traoñ bremañ. Klask a raent gwelout petra a dremene ahont war-dro an ti-kêr. »

## Diell A

### Prosesion ha reuz evit obidoù Naig Kein Aour lazhet gant gwarded war-varc'h

*Er bloavezhioù 1920 e Pont-'n-Abad emeur. Harzoù-labour ha manifestadegoù zo bet gant micherourezed ar friturioù.*

Pep a c'houlouenn ganto en o dorn kropet, peder bigoudenn gozh a oa bet lakaet da zougen korn al liñser. Peder bigoudenn ken oadet hag o c'hamaradez varv, garanet don o dremm kramennet, ha kruketao o choug dindan o mantell-gañv, du e-giz an noz.

Ouzh o ambroug, en daou du d'an arched, ur banniel ruz ec'hon gant pevar faotr yaouank war o fenn noazh, en-dro da bep douger.

A-dreñv d'an arched, e teue ur banniel gwenn-ha-du e liv, ouzh e ambroug ivez pevar faotr yaouank. Stlakal a rae o flegoù gant ar skourradoù avel gleb.

Diouzhtu war-lerc'h ar bannieloù e teue, gant un nebeud a gerentiezha da Naig kaezh, Laorañs Larnikol hag e guzulieren. Evit an holl e oa Laorañs ar maer atav. Hogen Toñton Laorañs n'oa ket e skerb en-dro d'e zargreiz. Aotrounez kêr, notered, medisined, koñversourien vras, ar re n'oant ket dindan ar Gouarnamant, a oa deut ivez, hag engroez ar wazed gwisket ganto o dilhad sul. [...]

Hag e reas an arched tro ar wetur-gañv hag e teuas war-gil, ar wech-mañ, d'en em lakaat adarre e-tal mogeriad ar warded war-varc'h. Ken na voe sko an arched e fronelloù ar roñsed.

Tarzhañ 'reas hopadennoù fuloret a-douez an dud :

« Chastre !... »

« Kigerien an diaoul !... »

« D'ar galeoù !... »

[...]

En tu all d'ar renkennadoù gwarded, e burev ar C'homiser, e porzh ar C'hastell, edo ar c'homandant Salaun krog er bellgomzerez :

« An urzh war an hent, komandant, an urzh. Warnoc'h e fizian, penn-da-benn. »

« Stanket eo traoñ ar C'hastell, aotrou Prefed, ne dremeno ket an interamant. »

« Moarvat. »

« Aet eo kuit ar veleien hag an dud a-zoare. »

« Moarvat. »

« Nemet chom a ra merc'hed, micherourien, paotredigoù, en ur ger berr, ar bobl izel, o c'hwitellat hag o youc'hal, ken na reont, aotrou Prefed. Daou pe dri mil den, aotrou Prefed. »

« Gwarded hoc'h eus, komandant ; peadra, komandant. Skarzhit din-me an hentoù. »

Youenn Drezen, *Itron Varia Garmez*, Aber, 2012 [1941], p.195-201



## Diell B

### Dibunadeg e Pariz

Deut e oa Lan gant Yestin hag ar re all betek an ti-kêr. Ac'hano eo e loc'he an dibunadeg. Ne vefe ket gallet tremen dirak ar sal m'edo bodet enni paotred o c'hroazioù-tan. Meur a renkennad polised a serre penn ar straed. Mat ! Klevout a rafent kanañ daoust da se kantikoù displijus d'o divskouarn. Kerkent ha ma loc'has ar strollad penn, ar vicherourien, dorn-ouzh-dorn evel ur chadenn stegnet eus ur riblenn-straed d'eben, o doa staget gant an *Internationale*. Dreist d'o mouezhioù don e fuc'he a vare da vare youc'hadennoù krennarded a gase « Laroque<sup>1</sup> d'ar bidouf » dizamant-kaer.

5 Lan, Yestin hag o bandenn a gane evel ar re all. Pa dremene ar wazed e sklêrijenn gann ur piler tredan e weled en daoulagad o steredenniñ spi divent ar Reveulzi-se a lakafe pep tra ha pep unan en e lec'h evit mat.

10 — Un dibunadeg evel nouspet hini all, a soñje Lan, en ur sellout en-dro dezhañ. Nemet gwall stank e kavan ar bolised. Ha c'hoazh n'o gweler ket holl. Skouadradennoù a zo war-c'hed er straedoù a sko war hent an dibunadeg.

15 — Ne gav ket din, Yestin, en deus un tamm re a soursi ouzhimp ar c'hamarad ministr Marx D<sup>2</sup>.

— 'M eus aon, eme egile, ez eo aet brokus gant al loa-bod en dro-mañ<sup>3</sup>. Mat ! C'hoazh ma c'hellfe magañ ur fiziañs divrall en e gurusted<sup>4</sup> !

20 Strakadennoù a fuc'has souden a-dreñv o c'hein, war-du penn ar straed Dagobert ma oant aet e-biou dezhi ur pennadig 'oa. Tamm-ha-tamm e tavas ar ganerien hag an dibunadeg a chomas evel sac'het. Youc'hadennoù skiltr a glevet en a-dreñv. Sutadennoù hir a save ha strakadennoù adarre. Klask a rae ar strolladoù mont war o c'hiz. N'hellent ket, ken stanket e oa ar straed gant an engroez. E solieradurioù an tiez, a bep tu, ne selle mui an dud d'an traoñ bremañ. Klask a raent gwelout petra a dremene ahont war-dro an ti-kêr.

25

Abeozen, *Argantael*, Mouladurioù hor Yezh, 2011, [1959], p. 50-52.

---

<sup>1</sup> Pierre Laroque : kargad-uhel evit Talbenn ar Bobl (1936-1938)

<sup>2</sup> Marx Dormoy : Ministr da vare Talbenn ar Bobl

<sup>3</sup> aet brokus gant al loa-bod : aet re bell ganti

<sup>4</sup> e gurusted : e gamaraded

## Diell C

### Ti-gwilioudiñ Gwengamp n'eo ket saveteet c'hoazh

Ur bloavezh hanter. Chom a raio ti-gwilioudiñ Gwengamp digor betek fin miz Gouere 2020 da nebeutañ, sañset. Divizet en deus Prezidant ar Republik reiñ ur goursez dezhañ pa oa deuet da Vreizh warlene, dre ma oa bet lakaet war-wel ar gudenn-mañ gant dilennidi ar vro. Embannet eo bet an diviz-mañ en un doare ofisiel, dre skrid, gant an ARS<sup>5</sup> d'an 8 a viz Genver 2019 nemetken.

Stourmet o deus implijidi an ospital, mammoù ha tadoù, sindikadoù ha dilennidi bro Gwengamp ivez evit derc'hel gant o zi-gwilioudiñ. Ne fell ket dezho ober 45 munutenn hent (betek Sant Brieg) pe 30 munutenn (Lannuon) evit mont da wilioudiñ na koll ur servij publik en o c'horn-bro c'hoazh.

Ouzhpenn 2 000 a dud o doa manifestet neuze er vanifestadeg kentañ, e miz Mae 2018 e kreiz-kêr Gwengamp, Noel ar Graet, en o zouez. An aotrou maer kozh, bet prezidant klub War-Raok Gwengamp, eo prezidant Kevredad broadel ar vell-droad (FFF) bremañ.

Diwar ar gazetenn enlinenn [www.dispak.bzh](http://www.dispak.bzh), 22/01/2019

---

<sup>5</sup> ARS : Agence Régionale de Santé

## Diell D



Manifestadeg e Brest evit yezhoù Breizh, diwar al lec'hienn [www.bretagne-info.bzh](http://www.bretagne-info.bzh),  
21/05/2021